



79

RECIT DEUS AR MALEURIO

ARRUET EN DEPARTAMANT AR VAR,

EN DRO DA SANT-ETIENNE,

OCCASIONET GANT AN ORACH,

AR 14 HAC AR 15 DIMEUS A VIS EVEN 1835.

Var un ton trist : *Judith hac Holophernes.*

JESUS, ma Salver adorabl,
Obtenet d'ho pec'her ingrat
Ar sclerigen da discleria
D'ar Vretonet, dre ar vro-ma.

Speret-Santel deus an env,
Gret din explican ep dale
Ar suit dimeus ar maleurio
Hac un darn deus ar miracle.

Quement-mâ so bet arruet
En departamant Var hanvet,
Dre deluch dour ha curuno,
Hervez ma raport ar c'helo.

Ma speret so epouvantet
Ha ma memoar so troublet
O tonet da sonjeal explican
Eur malheur an effroyaplan.

Un ilis hanvet Sant Germain,
Un templ santel d'ar gristenien,
Etre ma voat en ofern bred,
Gant ar curuno attaquet.

Habitantet leis an ilis
A voa o assistan en ofic:
Den neus gallet sortian,
Oll o deus renqet perissan.

An douar a deù da grenad
 Hac a ra d'an iliz cocañ
 Var gwein qement a voa enni,
 En eur moment d'ho ecrasin.

O ma Jesus ! tristan malheur
 Dre eur merq dimeus ho coler !
 Perisset tud an ofern bred
 Ep ma so hinin sortiet.

Totaliset gant tud savant,
 Var ar bord a pevarzec cant
 A voa en ilis biniguet,
 Hac a so devet ha beuet.

Nebetoc'h evit eur cart-heur
 Goude ma voa fin d'ar malheur,
 E plaç an ilis so savet
 Eur stang hir ha ledan meurbet.

Flotanç ar caeran batimant
 So cavet a donder er stang,
 Ha c'hoas e lavar ar scritur
 Ne dap qet ar fonç ar mesur.

Pedomp Doue a vir galon
 Da accordin deze pardon
 Ha d'ho lacat oll da repos
 Er gloar dimeus ar barador.

An Otro Richard, deus e di,
 Dious e dud o quimniadi,
 A guemeras e diare
 Da vont da ober un dro chasse.

Pa voa et dec paç dioute,
 E return e dro adare
 Hac a lavar n'eur guir crenn:
 Adieu, ma zud, evit biqen.

An itron, o clevet anezan,
 A commanças da hirvoudan:
 Perac, ma priet, emezi,
 E teut cren d'hon abandonin.

Evel ma hantre er c'hoat bras,
 An dour varnezan a deuas,
 Hac en em retir ep appel
 E appu, er span eur rochel.

Assambles gant an dour courant
 E commanç un tan violant,
 An tempest hac ar curuno,
 Qen a songe e voa mare.

Fardon, ma Doue, emezan ;
 Aman e renqan perissan,
 Ep gallout en em repuin
 Ha bean cals a vado din.

En eur sevel var eur garrec,
 E neus bet apercevet
 An tan coët dious an evo
 Var e noblanç hac e vado.

O bebes desolation
 A anireas en e galon
 Guelet consomin e vado,
 E vreg hac e vugaligo !

An itron, o velet an amser,
 A supplias prest e mevel
 Da vonet da glasq he priet ;
 Mar guie pelec'h e voa eet.

Evel ma hantre er coat bras,
 Souden gantan e arruas,
 E appu ar span eur rochel
 Hac e disposet da vervel.

Sevet, ma mest paour, emezan,
 E oc'h var ar poent da perissan :
 Gand Doue é eo preservet
 Ho pugale hac ho priet.

Respont a eure d'e vevel
 E lezel enon da vervel,
 Pa voa consomet e vado,
 E vreg hac e vugaligo.

Renqout a ra touet dezan
 Qent men deus credet anezan,
 E voa preservet gant Doue
 E priet hac e vugale.

Gant cals a poan hac a courach
 E teujont e mæs ar c'hoat bras,
 En dour betec ho dio gasel,
 An Otro-man hac e vevel.

An Otro so n'em vuestet
 Dre eur miracl e voa rentet
 E quichen gruio ar vezen,
 Ne voa e dud evit souten.

Pa voa gant e dud o parlant,
 E teu var e lerc'h un torranc
 Hac ar vezena voa ennan
 Neus groet dezan perissan.

Gheta i ehomet intanves
 Ha hi leun a tristedigues,
 Er voen gant e zri buguel
 Hac i disposet da vervel.

Pa eo bet bolonte Doue,
 E eo et an dour ac'hane,
 Hac int sicouret da disqen
 Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h heur ha tregont a amzer
 Int bet er voezen en miser;
 Da soulagin ho c'halono
 N'ho d'oa nemert an delio.

Ar mest a commande er forgeo,
 An Otro Seveni e hano,
 A voa attaqet gant an dour
 Ep gallout dont da n'em sieour.

Prosternin a ra dan daolin
 Da supplian hon Mest divin,
 Hac hon mam santel ar Verc'hes
 Da vezan e avocades.

Mar sovetean ma bue,
 Ha ma ouvrierien ha me,
 Me a savo un ti ar c'haeran
 Evit ar pevien er vro-man.

E nebetoc'h evit pemp minuten,
 Eo beuzet e ouvrierien,
 Ar forgeo, e varc'hadoures,
 Tout int perisset assambles.

Henor d'an Otro Seveni
 Var an douar ha melodi,
 Ha pa hei divar ar bed-man,
 Ar barados da jouissan.

An inin n'eas recitet
 Nomb a valorio arruet,
 Yan ar Guen, en fin ar guentel,
 O c'hortos e heur da vervel.

FIN.